

DEC. 2020 | NTV. 1

BRETONIG

KELAOUENN EVIT AR GRENNARDED

NEDELEG E
BRO-JAPAN

Get Enora LAMY

ATERSADENN AN
TAD NEDELEG

Get Etienne BARBIER

NEDELEG AL
LOENED EN S.P.A.

Get Lena PAILLOT

HAG IVEZ C'HOARI,
BITRAKIN, KEGININ...

Get L

NEDELEG E BRO-JAPAN

SKRIVET GET ENORA LAMY

E Bro-Japan eo Nedeleg ur gouel emporzhiet. Nedeleg zo ur gouel kristen hag ar Japaniz zo kentoc'h boudaaded. Lidiñ a reont Nedeleg memes tra. E Bro-Japan ez eus un nebeut a dud a zo kristen (~ 2% eus ar boblañs). Neuze ar Japaniz a lid an Tad-Nedeleg hep ar relijion hag an traoù tro-dro. Er XXvet kantved e Bro-Japan ne oa ket c'hoazh gwir Nedeleg duhont. Se a zispleg perak e ya ar brasañ eus ar vugale d'ar skol ar 25 a viz Kerzu. Mes betek 2018 e veze lidet deiz-ha-blez Akihito, impalaer an oadvezh Heisei (1989-2018) ha 23 a viz Kerzu oa vak neuze. An deiz vak-se zo bet diblaset ar 23 a viz C'hwevrer evit lidiñ deiz-ha-blez an impalaer nevez, Naruhito.

NEUZE PENAOS E VEZ LIDET NEDELEG GET AR JAPANIZ ?

E Bro ar Sav-Heol eo Nedeleg an okazion da reiñ profoù d'ar vugale. Met e penn-kentañ e oa mare Nedeleg ur prantad evit bodiñ an dud e karantez, ar c'houbladoù é lidiñ asambles o c'harantez, é kinnig profoù kenetreze,...Ne rakweler ket kalz a brofoù evit ar familh (nemet evit ar vugale). An Tad-Nedeleg zo anvet Santa pe Santa-San (サンタ) get ar Japaniz vihan. Met Miz an Avent zo ivez mare an Oseibo (お歳暮) e-lec'h ma vez roet profoù lidusoc'h etre keneiled dre skwer. Kavet a reoc'h muioc'h-mui a wez-sapin ha kinkladurioù Nedeleg e Bro-Japan dreist-holl e-barzh ar c'hêrioù bras, peurgetket e Tokyo a lujern gouloù marzhus enni e miz Kerzu !



E japoneg, « Nedeleg laouen » zo « Merikurisumasu » (メリークリスマス).

NEUZE MERĪKURISUMASU !

NEDELEG EN S.P.A

SKRIVET GET LENA PAILLOT

Pep bloaz e vez laosket muioc'h eget 100 000 loen e prantad Nedeleg peogwir e ya an dud e vakañsoù pe re ziaes eo d'ober war o dro met bez zo ivez tro dro 82 loen mabet pep devezh e prantad Nedeleg.

E Sarreguimines e vez chañjet euriadoù digor da Nedeleg. Digoret e vo da leur goude meren betek 5eur de noz. Aozet e vez ivez ur marc'had Nedeleg ha stalioù evit preniñ traou da zebriñ evel krampouezh ha gwin ruz tomm graet get tud a youl-vat ha sikour an SPA. Gwerzhet e vez ivez traoù evit al loened hag un tombola zo aozet ivez.

Pouezus-tre al loened eo ha ne faot ket o laoskiñ a-gostez, ne c'houlennont netra nemet karantez. Ma ho peus c'hoant da breniñ ur c'hazh, ur c'hi pe ul lapin e c'hellit mont d'an S.P.A e-tal ho ti, pe mont war lec'hienn internet an SPA.



Lec'hiennoù h chomlec'hioù :

Lec'hienn internet SPA An Oriant :
<https://spa-orient.com>

Chomlec'h : 80, straed Plañvour
 56350 AN ARVOR

Lec'hienn internet SPA An Henbont :
<https://www.secondechance.org/refuge/morbihan/spa-hennebont-inzinzac-748>

Chomlec'h : Forest Tremelin 56650 Ar
 Zinzag-Lokrist

UR SELL SKIANTEL ÀR AN TAD NEDELEG

Tizh ar stlejell ha pouez ar profoù

SKRIVETGET STEVANN LESELLIER

E ped TIZH e ya an TAD NEDELEG e pad an noz ar 24 an AZVENT ?

Evit kaout an tizh v e vez implijet ar formulenn $v=d/t$. Neuze ema ret kaout an hirder d hag an amzer t . An hirder d a zo dedreuzet a zo tost da 125 000 000 km, un hirder kavet ec'h ober an niver a chomlec'hioù (50 000 000) * an hirder geidenn etre an tier (0,25 km) hag an amzer t a zo kavet ec'h ober 24 + 7, amzer tro an douar + an amzer an noz, ha neuze, $v = 125\ 000\ 000 / 31 = 4\ 032\ 258,065$ km/h. Hag get an tizh-se e vez aet d'ar blanedenn Meurzh en un tamm muioc'h eget daou devezh.



Petra eo ar POUEZ hollat ar PROFOU ?

Kontet e vez 5 000 000 bugel a lid Nedeleg ha ma vez kontet daou brof evit ur bugel, ha pouez pep prof 500 g, $5\ 000\ 000 * 2 * 500 / 1\ 000\ 000$. Neuze ar profoù a bouez tamm pe damm 5 000 tonn, da lâret eo tost da 1 250 olifant!



Nedeleg berr-ha-berr

SKRIVET GET YANIS LE NY

KALZ ANVOÙ

An Tad Nedeleg en deus kalz añvoù evel Father Christmas e Bro-Saoz, Saint Nikolas e Bro-Velja, Papai Noël e Bro-Brazil, Jouluvana e Bro-Estonia ha Did Moroz en Ukainia



NEDELEG EN HAÑV

En Aostralia e vez lidet Nedeleg e-pad an hañv. N'en deus ket na erc'h, na manegoù pe boned evit Nedeleg mes kentoc'h bragez-kouronkañ ha monet da biknikañ war an draezhenn..

NEDELEG E S.U.A

Etre 1651 ha 1681ne veze ket mui lidet Nedeleg ha dilezet eo bet en Amerika an Norzh. Goude-se eo chomet ar fest pell amzer hep sinifiañs. E 1950 en America Norzh eo bet lezennekaet ar fest..



REKIPE

COOKIES NEDELEG

Nedeleg evit ar begoù lipous



AN AOZENNOU :

170 G AMMANENN
200 G CHOKOLAT
2 VI
230 G BLEUD
85 G SUKR ROUZ
2/3 LOAIAD KAFE
GOELL
HOLEN

COOKIES AES DA FARDIÑ


REKIPE GET GAIDIG LE MER

- 1) Ret eo labourat an amann blot get an daou sukr evit ma vo un veskadenn unvan
- 2) Lakaat ar vioù a-barzh ha ret eo meskañ tout an traoù
- 3) Ret eo liammiñ get ar bleud tamouezet, an holen hag ar goell e poultr.
- 4) Meskiñ
- 5) Lakaat ar malzennoù chokolad ha meskiñ adarre.
- 6) Ret eo goloñ ar plad a yay e-barzh ar forn get ar paper poazerezh pe paper sulfurizet.
- 7) Get div loa-kafe, lakaat tammoù bihan evel ur graonenn àr ar plad. Ret eo lakaat an toaz e boullou peogwir hi ya da lediñ.
- 8) Isforniañ hag kontañ 10 min poazherezh



BITRAKIÑ

PLEGADUR NEDELEG



PENAOS OBER UR
WEZENN-SAPIN
NEDELEG GET UR
SEVIDENN PAPER ?

AR WEZENN-SAPINE PAPER

SKRIVET GET ARWENN LE FALHER-LE GARFF

Prantad 1

Plegit ho serviedenn evel diskouezet àr ar fotoioù.

Goude-se troit ho serviedenn evit ma vo gwelet ur sort tric'horn.

Prantad 2

Plegit an daou gostez eus an tric'horn-se evit ma vo stumm ur sarpant-nij. Adplegit an tric'horn a-us deus ar sarpant-nij. Normalamant ho peus un tric'horn izoskelel.

Prantad 3

Troit ho serviedenn ha plegit penn an holl tric'hornioù vihan.

Setu ho sapinenn Nedeleg!

PLANEDENN

SKRIVET GET LISON JOLY




MAOUT

Evit Nedeleg e vo kalz a startijenn genoc'h. C'hwi a faot aozin pep tra evit ma vo Nedeleg ur mare hud. Netra ne vo lakaet en arvar mes dre forzh klask ar parfeted e kemero ho kostez diktatour an tu war-c'horre memes ma ne vo ket gwelet genoc'h. Laoskit hud Nedeleg da zonet e lec'h er forsiñ hag ho fest Nedeleg vo bravoc'h eget ar pezh a soñjit.

TARV

C'hoant ho peus ma vo plijadur get tout an dud ha faot a ra deoc'h kas sikour d'an dud ha lakaat da dremen festoù brav d'ho tud. Koulskoude ec'h it da ankouaat àc'hanoc'h ha mont a rit da vout ankeniet evit an dazont. Mont a rit da dremen e-tal ho fest Nedeleg.




GEVELLED

Ar festoù Nedeleg vo brav ha tu vo deoc'h soñjal e traoù arall memes ma tremen mat ho puhez evit ar mare. Tremenet e vo un Nedeleg laouen get joa ha rannet e vo get ho familh, bugale evel tud daet.

KRANK

Bremañ eo ar mare evit reiñ plijadur d'ar vugale. C'hoant ho peus da vout tostoc'h deus ar re Yaouank. Mont a rit da lakaat kalz a energiezh evit kaout profoù hag gopradennet e voc'h gant kalzig a garantez.



LEON

Ho Nedeleg a dremeno gant joa. C'hwi a ya da brofiñ ar gwellañ deoc'h d'ho tud evit ar feste fin ar blez. C'hwi a ya da lakaat levez er prantad-diaes-mañ get ho tud a vo àr ho tro.

GWERC'H

Ho Nedeleg vo disheñvel deus ho kouelioù Nedeleg tremenet mes chom a raio brav ha strobinellus. Get ar prantad-mañ e c'helloc'h bout an tammig nec'het ha c'hwi a ya da ranniñ ho nec'h d'ho tud. Mes chomit sioul hag ho fest vo brav.







BALAÑS

Evit Nedeleg ec'h it da zispigniñ hep kontiñ. Mont a rit da dostiñ doc'h ho tud rak pell 'zo n'ho peus gwelet ho familh. A-gaoz d'an dra-se ne laoskoc'h netra na den ebet da darviñ ho fest! Neuze ho fest vo tremenet get joa.

KRUG



Ar prantad-mañ zo pouezus evidoc'h, imoret-ma e voc'h. Daoust d'an tabutoù bihan a vo get ho mignon(ez), mes n'ho peus ket c'hoant da dremen e-tal Nedeleg neuze e kavoc'h un emglev evit echuiñ ar blez en un doare brav.



SAEZHER

Da Nedeleg vo tu da ziskouez d'ho tud pegement int karet genoc'h. C'hwi a zispigno ur bochad argant da ankoueat ar virus ha da gomz diàr traoù don-donañ d'ho tud.

GAVR



Evit Nedeleg ho peus c'hoant traoù simpl ha ne gousta re ger : nemedoc'h hag ho tud é varbotal. D'ar mare-mañ e vevit en disurentez mes ne vankit ket a faltazi nag a joa.



SKUILH-DOUR

Nedeleg vo brav ha c'hoant ho po da lakaat ur bochad livioù en ho puhez. Pep tra a dremeno mat evidout, mes ho tud a c'hello bout skuizh genoc'h. Sioulit un tammig hag e vo brav-tre evit tout an dud.

PESK



Nedeleg vo brav mes ho santimantoù a cheñch kalz ha buan. Evit Nedeleg e voc'h evel ur bugel. Nedeleg zo ur prantad ne faot ket bout kalavet t. Tremeno a raio evel ho peus soñjet.

C'HOARIOÙ

SAVET GET HOEL JANNIN



Gerioù-kuzh Nedeleg

Klaskit ar gerioù amañ !

H	X	X	S	T	E	R	E	D	E	N	N	K	K
K	K	B	B	O	U	L	E	N	N	T	Y	J	L
M	G	G	A	R	L	A	N	T	E	Z	E	N	N
K	A	R	V	-	E	R	C	'	H	E	I	B	K
C	P	B	O	N	E	D	T	L	S	C	K	L	H
C	H	O	K	O	L	A	D	R	P	R	O	F	T
E	P	M	M	J	A	A	D	K	O	A	N	G	I
S	A	P	I	N	J	L	O	A	R	R	V	J	B
H	F	J	J	F	X	S	I	M	I	N	A	L	K
K	P	L	U	T	U	N	Y	K	E	L	E	N	N
W	U	L	T	X	G	Q	H	U	I	F	V	H	S
K	B	C	T	R	A	I	N	E	L	L	G	U	E
G	F	L	Z	R	E	R	C	'	H	I	X	L	Y
A	T	T	J	K	E	F	X	O	P	J	N	S	C

www.educol.net


Adkoan	Boned
Boulenn	Chokolad
Erc'h	Garlantezenn
Kavr-erc'h	Kef
Kelenn	Loar
Lutun	Prof
Sapin	Siminal
Steredenn	Trainell



Gerioù-kroaz Nedeleg

A-blaen

1. Gellout a ra bout un tamm koad pe un dra da zebriñ.
5. Lec'h ma vez diskennet gant an Tad-Nedeleg.
7. Gwenn eo.
8. Plant get boullouù ruz
11. War benn an Tad-Nedeleg emañ.
12. Lec'h e lak an Tad-Nedeleg ar profoù. Staget e vez war ar sapin pe doc'h ar siminal.
14. Oto an Tad-Nedeleg eo.
15. Staget e vez ar voulenn hag ar garlantez warnañ



A-sonn

1. Sachiñ a reont trainell an Tad Nedeleg.
3. Dour-skornet eo.
4. Staget e vez doc'h ar sapin.
6. Debret e vez da Nedeleg.
9. Sikour a reont an Tad-Nedeleg.
10. Pred bras Nedeleg.
13. Epenn ar sapin emañ.



Atersadenn an Tad Nedeleg

SKRIVET GET ETIENNE BARBIER

Etienne zo en em gavet get an Tad Nedeleg ha distroet eo get lan a ditouroù diàr-benn ar brudetañ tad e bed a-bezh.

Plijet oc'h get ho labour ?

- Ya, plijet on rak ma micher eo lakaat eürus holl ar blanedenn peogwir eo bedel Nedeleg. Labourat a rit bemdez ?

- Ya bemdez e pakan profoù evit roiñ anezhe da holl ar vugale ha d'an dud deuet. Kalz a labour zo.

Petra a blij doc'h ar muiañ en ho labour ?

- Krouiñ ar profoù. Ne blij ket din pakañ ar profoù.

Penaos e tremen un devezh en ho puhez ?

- Sevel a ran da 6 eur da vitiñ, lakaat a ran ma dilhad ha debriñ a ran ma lein. Goude-se e lennan ar gazetenn hag e sellan doc'h ar skinwel betek 9 eur. Gober a ran un dro d'ar stal evit sellet penaos e avañs an traoù. Betek kreistez e sikouran ar lutuned en o labour. Goude merenn e pakan profoù betek an noz. Mont a ran da gousket tro-dro hanternoz.

Petra eo ho plijadur bemdeziek ?

- -Lenn lizheroù ar bugale

Peseurt sonenn a blij deoc'h ar muiañ ?

- -Ar sonennoù Nedeleg evel Jingle Bell ha Tad Nedeleg Bihan. Selaou a ran anezhe bemdez.

Jentil emañ al lutuned ?

- Ya, al lutuned ne gomzont ket kalz met labourat a reont mat.

Ma kemerehec'h vakañsoù, pelec'h ec'h ahec'h ?

- E Breizh. Bep bloaz e yan du-hont e-pad un dibenn sizhun

Karout a rit Breizh ?

- Ya, kalz. Bout a zo du-ze ur sevenadur diorroet bras.

Piv eo ho kirvi-erc'h ?

- Bout zo Rudolf, Egar, Avel-Dro, Dañsourez, Feul, Kometenn, Cupidon, Kurun ha Luc'hed.

Bout 'zo ur Vamm Nedeleg ?

Ya, sikour a ra kalz ac'hanon. Hi a ra an dilhad Nedeleg bep blez.

Streset emac'h e-raok ar 24 a viz Kerzu ?

- Ya, rak se zo mare ar blez evidon. An holl lutuned hag ar Vamm Nedeleg zo un tammig ankeniet e-raok ar 24.

Abaoe peseurt amzer e ouiit brezhoneg ?

-Abaoe ma bugaleaj, desket am eus brezhoneg gant ma zad hag eñ get e dad. Komzet e vez brezhoneg er Pol Norzh.



Tresadenn get Hoel JANNIN